

# DISPUT.

## Etre eul LEONARD hag un TREGUERIAT

*Var un ton ancien*

Mar plich ganèc'h, sélaouit hac cléfot cana  
Ur chanson so compostet a nevez er blos-mà,  
Zo grèt da zaou zen yaouanq o devoa speret mat;  
Zobars en hostaliri oc'h eva bountaillet.

Al Leonard a c'houlen digant an Tregueriat :  
Lavar din-me, va mignon, ha te so ur pot mat;  
Evidont-me so agil, ouspen oon mat a grog,  
Rac souben vad a meus me, alies te pez yod.

Ha me, eme'n Tregueriat, a so soupl a goublou  
A voar larda va gouzoug gant ar grampoezenenn ;  
Va yod a zebran iye alies coulz ha c'houi ;  
Mar oc'h eus c'hoant da gregui, sortiomp ens an ty.

Non pas, eme'l Leonard, lezomp an traou-se tout,  
Hac evomp peh a vanne da ringa hor gouzoug :  
Ne blich qet din ar gannou, ispicial pa veian  
Va goat e tont da redec, da fatica. e tenan

Control, eme'n Tregueriat, pa vezan malicet  
Ne ran fors evit guellet va goad sur o redec ;  
Potrel Treguer zo agil, tout ec'h ouzont lampet,  
Neus netra ouso ampec'h, hian eo o lavrec.

Ne choquit qet Leonis gant o bragueyer bras,  
Rac trao eus ar modesta e zint, mar boe biscoas ;  
Neus nienn quer caér quisjet en escopi Treguer  
Evel ma zeo Leonis gant o dillat, mezer.

Guîr avoalec'h a leverez, mat eo sur da réson ;  
Mezer brao so en Leon, mes grèt int difécon :  
Guicamanchou Leonis a gavan divalo,  
An trifars eus ar goaset a guz oll o dragon.

C'hioi entrezoc'h, Tregueris, ho pragueyer so ourlet  
Evel ma vent mailluret en dro d'ho liou vorzet :  
Ho chapeunou so flanchet, ho toue so campet,  
Casimant e zoc'h envel demeus ar soudardet,

C'houi entrezoc'h, Leonis, oc'h eus rochedennou  
A so grèt evel sier da zouguen sac'badou ;  
Ho pléo a so bisoulet, ho touou distronct,  
Da zioual ho tiscouarn, rae aon na vent chasset,

En án, pa ve pardonnou, me a zo bras souezet,  
O velet merc'het Triger penos e zint guisquet :  
Tout o deus dantelezou en dro d'o c'hoefou bér,  
Tortillet endro d'o bizach evel ur torchouer.

Comizomp avec'h Leon, dindan o c'honefou bras,  
Ma veut emesq Tregueris, n'o dese mui a c'bras ;  
Ar panez zo falcus ouspen ma zint noazus,  
Rac aon bras sur o deveus na vanque boued d'o zud.

Penevert ma ya Leonis en Treguer da neuta,  
E c'halfac'h dere'hel ho merc'het er guér da azezan :  
D'azezan ha da zansal gen huel ho sen,  
Rac Leonis ze potret nsc a gar an neud goen.

Ha na deufe qet Leonis en Treguer de neuta,  
Nihon eus marc hadourien et guér ous o frenn,  
Hac o guér da Leonis, dre ma zin met ga soupl,  
Rac ar merc'bed'a Leon a ne evel o eud stoup,

Me vel erfist, va mignon, divalo e parlantet,  
Ma vec'h cavet e Leon, c'houl a ve dyf'let ;  
Ho merc'het ai zo agil hac our n'om mania ,  
Ur gourach vras o deveus pa gomançont facha.

Me voar erfist, va mignon, int no tamie cruel,  
Mes iye c'int qet seder evel merc'het Treguer ;  
Tout en o c'hasan rustiq, dindan o c'honefou bras,  
Hor merc'het ni zo ceder ha joaùs ho bisach.

Tevel a ri, va mignon, ne teus sur tam réson,  
Birviqen na pe maoues a excepti Leon :  
Qemer ur plac'h a Dreguer, ha dalc'h-hi en e renq  
A fioch dide crampoez da zehri gant lès trenq.

Pa parlantes a crampoez, ganemp-ni en hor bro  
E zeus calz a Leonis gant neud dre'r marc'bagou,  
Hac a zail gant ar c'braumpoez pa elient o c'havet,  
Ha c'hoas goude o debri a lip o bieziet.

Coll a rân ganit, Tregueriat, n'allan mui chom amân  
Poan a ra din em c'halon, mè meus aoun ne douan clâñ :  
Mar car Blor imprima hon disput yar baper,  
E laqayo da c'hoarzin Querne, Leon, Treguer.

Ar zon-mà zo compostet evit hoc'h amusi,  
Ha non pas vit ma vezoz entrezoe'b fachir :  
Bezit éta a Dreguer, a Guerne, pe Leon,  
En em garit entrezoc'h vel a die peh Breton.

Guechal en em occupet gant calz a chansonniou  
Ha n'en em genet morse gant follementiou :  
Rae se oll, mar'am c'heredit, prenit peh a chanson,  
Ha canit nos a mintin, deus a greiz ho calon.

Pa vec'h e creiz ho labour, occupet hed an de,  
Lesit hu corn ha canit ur chanson vras neuze :  
Ncheutoc'h e const eerten ha ya'hassoc'h ouzpen  
Cana eguet n'eo fumi mac eva gredouen.

Elec'h ma zeo imprimet an diou chanson gôsmâ  
E vezoz cavit uan an evit bep déiz ar blosa ;  
Aa ma na vez qet aostale h'e vezoz ajoutet,  
Evit laqat jousüt etouez ar Vretonet.

D'an nôs, pa ve assamblet ar famill goude coan,  
Azeet en dro d'an oaléz e qichenic an iau,  
Canit pepini d'e dro ur chanson vras neuze,  
Ha m'en assur e coseut calz guicloc'h goude-eze.

FIN

B 220, 00.575